

Lodenn III: ar vuhez politikel e Frañs

Tem 2: Republik Frañs é vonet d'an traoñ hag é sevel en-dro (1940-1946)

1939-1940

Faezhidigezh ha diskar an Illvet Republik

- Un « **iskis a vrezel** » etre miz Gwengolo ha Mae 1940: ar soudarded digalonekaet é c'hortoz el linenn Maginot
- **Aloubet eo ar Frañs**(digolloù pounner da roiñ da Alamagn nazi, an Norzh hag ar C'hornôg dalc'het
- Goulenn a ra Petain an arsav-brezel ha sinet d'an 22 a viz Even 1940.
- 10/07/1940: **hollc'halloudoù** etre daouarn ar marichal Petain

1940-1944

Ar renad Vichy

- **Pétain**, e penn ar renad Vichy ha **Pierre Laval** e-penn ar gouarnamant Vichy, a sav ur renad mirour hag aotrouniek hag a oa broudet get an doujañs doc'h ar Marichal Petain.
- Ar programm: **An Dispac'h broadel** diazezet àr ur ger-stur nevez: Labour, Familh, Mammvro
- Statud ar Yuzevien e miz Here 1940.
- Berzet eo ar **frankizoù ha gwirioù ar geodediz**: ar strolladoù politikel, ar sindikadoù, an harzoù-labour, kontrollerezh ar mediaoù hag evezhierezh ar polis.
- **Kanmeulet** eo Petain get ar propaganda, « salver ar Frañs ».
- Kenlabourerezh politikel: ar **Milis** é treseal ar yuzevien hag ar Resistañted
- Kenlabourerezh ekonomikel: an **STO (Servij al Labour Ret)** e 1942 a rekiz an holl Frañsizion etre 21-23 blez evit mont da labourat da Alamagn
- Kenlabourerezh ideologel: **enepyuzev**

Skrabadeg **Velodrom goañv** (16-18 a viz Gouere 1942) anvet ivez Vel'd'Hiv: 13 152 yuzev harzet , en o zouez 4000 bugel get polis ar Frañs. Deportet e vint àr-zu Alamagn.

An tiriad gall
etre 1940-1944



Mae-even 1940

Àr-lerc'h an arsav-
brezel(22/06/1940)

1944

1940-1944

Ar Resistañs

- Galv **Charles de Gaulle** a Londrez àr ar **BBC** d'an **18 a viz Even 1940** da gendec'hel ar stourm .
- Krouiñ a ra an emsav « **Frañs dieub** » hag ur miliad bennak a dud en em vod en **FFL(Forges françaises Libres)**, un armead gall dieub doc'h doc'h ar Frañs dieub. Rol dezhe e oa skoazell ar Gevredidi àr an holl dalbennoù.
- Abegoù a bep seurt: ar vrogarouriezh, ar youl da nac'hiñ an dalc'hidigezh, nac'hiñ ar renad Vichy, kuzhat ar Yuzevien pe ar resistañted, nac'hiñ sentiñ doc'h ar velestradurezh gall..;
- Gwazed ha merc'hed daet e metoù disheñvel hag a bep liv politikel unanet er Resistañs
- A-dal 1941 en em stumm ar Resistañs diabarzh e Frañs : strollet eo an holl emsavioù a stourm e-diabarzh Frañs en **FFI(Forges françaises de l'intérieur)**
- **Ar rezistañs diabarzh** a ya àr greñvaat get ar gomunisted é kemer perzh ennañ àr-lerc'h aloubadeg URSS ha tud enep d'an STO.
- Emsavioù ha rouedadoù kuzh a oa krouet: **Libération-Sud**(tu kleiz), **Combat**(awenet get De Gaulle),**Brutus**(sosialisted), **Francs-Tireurs ha partizaned gall** , **Front national** (komunisted)
- **Liberation-Sud**:emsav bras a Rezistañs krouet e 1940 get **D'Astier de la Vigerie**. Strolliñ a ra tud èl Lucie Aubrac. Krouiñ a rant ur gazetenn e Lyon, **Libération** d'ober propaganda enep renad Vichy.
- Obererezhioù liesseurt e raent: titouriñ Londrez get kemennadoù àr ar radio BBC, tagiñ an Alamaned dre sabotiñ , gwalltaolioù...
- Ar yaouankiz a-dal ar blez 1943, a dec'h kuit àr-zu ar « **strouezheg** » get aon da vout paket get an STO.
- Kas a ra De Gaulle **Jean Moulin** da Vro C'hall e 1942 evit unvaniñ ar rezistañs: krouet eo an **CNR(Kuzul Broadel ar Rezistañs)** e miz Mae 1943 ha bodet an holl stourmerien guzh er strollad FFI(Stourmerien c'hall an Diabarzh).

1944-1946

Ar Republik adsavet

- Dieubet eo ar Frañs get ar Gevredidi sikouret get an FFL ha FFI en dilestradeg Normandi (6/06/1944) ; Pariz a zo dieubet d'ar 25/08/1944. D'ar 15/08/1944 eo an eil dilestradeg er Provañs.
- Dont a ra ar jeneral de Gaulle da vout e-penn **Gouarnamant da c'hortoz Frañs(GPRF)** diazezet en Aljer.
- Lakaat a ra ar GPRF e-pleustr programm ar CNR: ensavadurioù republikan adsavet, frankizoù pennañ(relijiel, sindikad, politikel) adsavet, nulliñ ar lezennoù Vichy..
- **Gwir mouezhiñ d'ar merc'hed e 1944**
- **Krouidigezh ar Surentez sokial e 1945**
- **Broadeladurioù(SNCF...)**
- Barnet eo ar genlabourerien: mare ar **skarzhadeg(puriñ)**: kastiziñ a re o deus kenlabouret get an dalc'her alaman.
- Ar Vodadenn vonreizhiñ a skriv **ur Vonreizh**: ganet eo ar IVvet Republik(1946).
- **De Gaulle a ro e zilez**, n'emañ ket a-du get ar Vonreizh nevez hag emañ evit ur galloud seveniñ kreñv.



Philippe Petain 1856-1951

Penn ar Stas c'hall etre 1940 ha 1944 hah en deus kaset ar renad Vichy àr hent ar c'henlabourezh. barnet e 1945 evit bout kenlabouret, kondaonet d'ar marv. Met bac'het e vo a-hed-buhez.



Jean Moulin 1899-1943

Prefed savet a-du get ar jeneral De Gaulle e 1940. Bet krouet ar CNR getañ. Harzet e 1943 get Gestapo Lyon e varv diàr jahinerezh.



Charles de Gaulle 1890-1970

Penn Nerzhioù ar Frañs dieub(1940-1944) ha goude penn ar Gouarnamant da c'hortoz ar Republik(1944-1946).